


BEVIÑ EDAN AR RENAD KOZH

Teul 1. Piramidenn an oadoù e Frañs e 1740



— Livit e gwer mouk an troc'had oad 0-20 vlez, e gwer splannoc'h an troc'had 20-60 vlez, hag e melen ar re goshañ.

— Pezh troc'had oad eo an hani brasañ (= a zo niverusañ an dud ennoñ) ?

— Pezh troc'had oad eo an hani bihanañ ?

Teul 2. Niver ar vugale marvet diàr 1000 a re ganet

	Maezoù diazad Pariz	Tourouvre-au-Perche	Chalais (Anjou)
da - evit ur blez	214	305	351
etre 1 ha 5 blez	128	163	115
etre 5 ha 10 vlez	51	41	46
etre 10 ha 15 vlez	?	41	10

— A-ziàr mil a vugale ganet, pet a zo c'hoazh bev pa arruont get an oad a 5 blez (A) ?

— Jedit dregantaj ar vugale marv e-raok arru get o femzek vlez (B).

	Àr ar maezoù e diazad Pariz	E Tourouvre-au-Perche	E Chalais
A
B

Teul 4

Au printemps de 1652, la ville était tellement pleine de pauvres qu'il semblait que des processions fussent arrêtées au-devant de chaque boutique de boulanger qui criaient à la faim, priant à jointes mains de donner du pain contre de l'argent ; certains s'en retournaient comme en désespoir ; les autres attendaient deux jours entiers pour avoir un pain ; l'on a trouvé quantité de morts sur les chemins. [...] Une pauvre portant et allaitant son petit enfant a été trouvée morte en une prairie ayant encore la bouche pleine d'herbe et mangeant comme une bête, et son petit enfant encore vivant entre ses bras.

C. Macheret,

Journal de ce qui s'est passé à Langres de 1628 à 1658.

Teul 5

D'an 11 a viz Kalan-Gouiañv 1601¹ ema frotet e benn evit ar wezh kentañ.

D'ar 17 a viz Kalan-Gouiañv 1601 ema frotet e dal hag e fas get amanenn fresk hag eoul alamand dous a-gaoz d'ar lousteri a hañvale donet àrnezhe.

D'ar 4 a viz Goureneñv 1602 ema kribet e vlev evit ar wezh kentañ ; kavout a ra kaer, doc'h ar seblant, ha lakaat a ra e benn hervez an tachadoù mah en doa debron.

D'an 3 a viz Gouel-Mikael 1606. Gwalc'het eo e dreid en dour sklaer... Ar wezh kentañ e oa dezhoñ.

D'an 2 a viz Eost 1608, ema bet é c'haronket evit ar wezh kentañ.

J. Héroard, *Journal a-ziàr bugalerezh ha yaouankiz Loeiz XIII*, 1601-1628.

1. D'ar 27 a viz Gwenholoñ 1601 ema ganet Loeiz XIII.

Teul 6

28 a C'houreneñv 1669. Pevar pe bemp a dud, e-mesk ar re a oa ar gredenn àrnezhe hepken bout klañv ar sizhun gent, hag a oa bet serret ha lakaet a-kostez evit bout suroc'h, a zo marvet get ar vosenn ; estroc'h evit e kêr Amiens ema ar c'hleñved-mañ ec'h ober e reuz : en ur gêrig anvet Oresmaux, teir lev ac'hanemañ, eh eus un nebeud tud hag a zo marv a-c'houde eizh pe zek deiz.

4 a Eost 1669. Derc'hel a ra ar vosenn d'ober rustaj e Oresmaux. Rac'h an dud hag a zo e tier skoet d'ar c'hleñved a zo lakaet da zonet er-maez, ha kaset int d'ur c'hoad, er-maez a gêr, a-barzh e lojoù dispartiet rac'h doc'h an eil egile, ha rac'h ar pezh a rekont a zo pourvezet dezhe betek bremañ.

6 a Galan-Gouiañv 1669. Ar revenn vat hon eus bet a-c'houde disadorn he deus glannaet ur yoc'h an tachadoù kontammet, a gav genin. Nebeut-nebeut a dud a varv.

Journal un den a Amiens, 1669-1770.

Teuyl 3. "Dijablit-ni ag ar vosenn, ag an naonegezh hag ag ar brezel"

— Goude ho pout studiet an teulioù amañ a-us, esaeit klokaat an danvez brastres kenniget deoc'h get an darvoudoù ha fenomenoù amañ edan :

*Eostoù fall
Kleñvedoù red
Brezel
Naonegezh*

ha liammit get biroù ar sternigoù etreze, evel ma jaoj (hervez ar skwerioù roet deoc'h).

Ar brastres-mañ a zo e bal diskoueziñ pezh sistem kaozoù ha heuliadoù a oa abeg d'ar re varvañs a veze e amzer ar Renad Kozh.

